

KLERON MALAKOFF

War an ton neve

Eun de, ouz Se - bas - to - pol, ar zoua - ved a you - c'he

oll : « Ha war rok ! be - vet ar Frans ! » ar c'hle -

war an dro

ron 'zo - ne ar - lans ha war rok ! ha war rok !

Eun de, ouz Sebastopol,
 Ar zouaved a youc'he oll :
 « Ha war rôk ! bevet ar Frans ! »
 Ar c'hleron 'zone al lans,
 Ha war rôk !

Ha du-hont war an dosen,
 Ar Rused, gant Totleben,
 A lac'he meur a zoudard,
 Ar c'hleron a zone stard :
 Ha war rôk !

Eur Breizad, er ha m'halle,
 Gant e holl nerz a zone,
 « Gwelet 'vo ; me vo daonet
 Ma na lac'han-me Rused ».
 Ha war rôk !

Ha war-rôk ! Ar boulejo
 'Dremene 'uz d'o fenno,

« Eur momet, hag e vefomp
War ar run, 'lec'h tiskwisfomp ! »
Ha war rôk !

Ha war rôk ! c'hwel hon Breizad,
Pôtr yaouank, pôtr skanv a droad
O kouean war ar Rused,
Ar re-man oa spourouet.
Ha war rôk !

O krapat war an dosen,
En e vrec'h 'n euz bet eun tenn,
E fuzuilh 'losk da gouean :
« Ha war rok, 'pad ma vevan ! »
Ha war rôk !

Da gentan krapet d'an nec'h,
D'e gleron e roe bec'h.
Ar c'hleron deuz e c'heno
A c'halve an armeio,
Ha war rôk !

Eur vouled a-dreuz d'e c'har !
Kouean 'ra war an douar :
Er fank ru en e goaze
Ar Breizad a glerone,
Ha war rôk !

Mac-Mahon gant ar banniel
Dispaket 'barz an avel,
A zeblant d'e dud laret :
« Ar Rused a zo lardet »,
Ha war rôk !

Eur groaz gaer goneet mad
A zoug breman hon Breizad,

Ha gantan eo enoret
Plouillo, e vro garet,
Ha war rôk !

Malakoff en e speret
Don ha stard a zo chomet ;
Klevet 'ra c'hoaz a-wejo
Ar c'hleron, ar boulejo,
Ha war rôk !

Bretoned, evel gwechall,
Er brezel nan oc'h ket fall ;
Ni ive, gant ar c'hleron,
A gerzo hon ferno zon,
Ha war rôk !

Demp arôk 'vit Breiz-Izel,
'N eur ganan, demp d'ar brezel,
'Vit difenn eur vro ken kaer,
Bezomp holi zoudarded têr.
Ha war rôk !

Breman eta, Bretoned,
Lezomp ket ar C'hallaoued,
Da waskan hon Breiz-Izel !
Souz, Gallo, 'rôk hon banniel,
Ha war rôk !

A. AR BOURDONNEG,
Barz Plouillo.
